

### Ar Soudard iaouank.

Demeus a c'hanon va heunant na pa vezan aviziaou  
Me a meus laked va spered da gompozi sonniaou.

Na breman me a zo pedet gant darn deus va mignonet  
Da zond da gompozi eunan pen da ben var ar chujet.

hag ar chujet de gompozi a zo gred da eun den iaouank  
Da eun den iaouank a deur minor a d'eun den divertissant

Zo greed dezan a de vestrez pere neur garie fidel  
Allas arru eo an amzer ma ranko e dilezel.

e man lenet ar vandamant er gadeur er fin ar pron  
Da lared d'ar potret iaouank dond dar jeneration

Da lavaret d'ar potret iaouank dond da dena dar billet  
Da eiz eur demeus ar mintin dirag o c'habitened.

Da eiz eur demeus ar mintin dirag d'or an ospital  
Sonn a rai an taboulinou ma klevo ar jeneral.

– Nag el leal va mestrezik me garje vijer oblijet  
Da dond gane disul da(1) vengamb da sellet tena dar billet

– Nag el leal va chervijer ne ouffen ked o sikour  
estrig id oc'h a vezo enon var c'hoas o c'houlen sikour.

nouffen emedi pedi Doue ag an otrou Sant Jermen  
mar rankit tena dar billet ma tenot an hini guen.

Digoëzet eo gantan ar malheur rankout tena dar billet  
e lec'h tena an hini guen an hini du an deus tenet.

a seiz kant leo doc'h ar vro man e ze deut e gabiten  
O kleved ar brud a nezan de velled a de gompren.

– Daoust ag eme e gabiten, a ne saffe ked ta vrud  
te a gare kaouet ar gonje da vond da velet da dud.

te a gare kaouet amzer c'houec'h sizun da vond d'ar ger  
e lec'h c'houec'h, seiz va mignon, m'ho kavo p'am bo affer.

Pa ze bed c'houec'h sizun er ger ag en e drankillamant  
en devez bed atreprenet dond da velled e dous koant

A deoc'h emezi va servijer pa zoc'h distroët d'ar ger  
Me a gred d'oc'h o propochou c'houi a zo bed godisser.

C'houi o poa va gonezet gant eur voallen arc'hant pe ziou  
Kaër am boa chonjal o zerri c'houi a voa atoa(2) dam dezir.

Moris Follezour, Taole, 17 meurs 1851.

(1) *Le ms. a plutôt va que da.*

(2) *Ms : atoa ; lire : atao ?*